

Lomig Droniou

Toull ar Bleiz

A ! ma bugale baour, me zo ‘vond da lared deoh eur gontadenn, ma eo se oh deut amañ, ya, me gred din, an dra-ze a blijo deoh toud, oll, hañ ?

Pez ah an da lar deoh, n’eo ket eur gontadenn, n’eo ket eun istor, nag an eil nag an all, ha c’hoant am-eus da lared deoh, an daou war eun dro.

An amzer a gomzan deoh n’eo ket deh e oa, nag an deiz ‘raog, na deg vloaz ‘zo, na, O ! lakom zo kant vloaz abaoe ma oa tremenet an dra-ze ba’r vro-mañ, en gwirionez.

‘Barz Plougerne, anaved rit Plougernevel toud, ya, sur, ha ‘benn ‘ta, d’ar mare-ze oa eun eured braz da veza. Ha perhenn an ti-ze, n’on ket evid lared e hano deoh, med perhenn an ti-ze, me ‘gav din, oa eun den êzet. Eun den memez pinvidig, ‘veze laret d’ar houlz-se.

Hag e veze eurejet e verh.

‘R houlz-se, se oa eun tropad deiziou a-raog gouel an Nedelec, me ‘gav din, daou pe dri deiz a-raog oa se toud, peogwir ar mestr oa dao dezañ boud goulennet an droad gand an Eskob deuz Sant-Brieg ‘vid eureuji e verh d’ar mare-ze, hag e-noa bet eur bermision. Me ‘gav din, memez, eñ oa mér ar barrez, n’on ket ‘vid lared deoh, med, sur a-walh, ma oa ket ar mér, oa gwall-dost d’ar mér. Ha setu pedet tud, O ! O ! O ! gwechall-goz e veze laret, pa veze eun dra gaer, eun eured braz bennaked e veze laret : « Ennañ oa tud deuz Porz Loeiz ha partoud. » Goud a rit ‘menn ‘ma Porz Loeiz ?

Rit ket ? Med an dra-ze zo... O ! N’eo ket pell deuz an Oriant. Med n’eus forz. Ha, pa oa erru deiz an eured, laran deoh, oa tud ba’ bourk Plougernevel ‘n deiz-se. A ! ya, n’on ket ‘vid niverenni aneze deoh, kement ‘vel oa ! Me oa iveau ! ya, ha ‘vid vehe bet kaeroh an eured, oa galvet daou zoner, ya, daou zoner braz, deuz ar re wellañ zo ‘barz ar vro, mem ! Deuz ar re wellañ ‘zo en Kerne memez a-bez.

Unan deuz ‘ne oa hanvet Erwan Bihan hag egile Erwan Vraz. O ! daou Erwan, med se ne lara ket oant kar nag an eil nag egile, med sonerien oant ha dre-ze memestra noant eun tamm karantez, ar zonerien vraz.

Pa oa erruet deiz an eured atao, ar zonerien ‘z ee ba’r bourk a oa e kas ar paot्र-eured hag ar plah-eured dre ar bourk a-bez-kaer deuz an eil ostaleri d’an all. A ! Dañsou oa bet war plasenn ar bourk en deiz-se, me lara deoh. O ! la ! la ! eur blijadur oa gweled se. O ! pegement a dud oa ennañ ‘selled an eured an deiz-se. A ! A !

An oll deuz ar barrez oa ennañ, me gred ‘walh, ha memez deuz parreziou ken kaer oa deuz Plonevez-Kintin, ha deuz Leskoad ha Pellañ, me oar-me, tud ‘oa. Hag an eured oa bet ker spontuz. Soñjit ‘ta ! Eun annoar oa bet lahet ‘vid ober ar friko hag a boueze eur mil da nebeuta, eun annoar yaouank, lard-pesk, hag eur penn-moh hag a boueze sur ‘walh, tre, O ! lakom, daou-hant hanter – tri-hant lur. Ha toud-se oa prestet ‘vid ober ar pred, ar prejou ya, kar ouspenn eur pred oa, peogwir an eured, an eured laran deoh a oa ‘vond da bad daou zeiz, daou zeiz leun, hag an noz en tu all. Setu an eured ‘n-oa tremenet mad, mad-tre. Debret noant an dud, hag

evet noant, pez 'ree vad deze. Hag ar bloavez ma laran deoh oa eur bloavez jistr deuz ar gwellañ, jistr mad, en galleg an dra-ze 'vez laret « Hennez 'zo eur liqueur, eur liqueur ! » Hag a gase kalon da memez ar re glañv. Ha sonet oa war an deiz, dañset 'n-oa an dud. Pa oa debret koan neuze d'an noz, ennañ oa digouezet, A ! tud deuz a bell bro, tud deuz a bell bro, deuet, deuet da weled ar fest-noz, deuz Kergrist, deuz Plougernevel, brao 'vez kompreñ, deuz Gouareg, deuz Plounevez- Kintin, deuz Pellañ, deuz Leskoad, a oa, a oa erruet tud ennañ.

Yen oa an amzer, soñjit 'ta, eun tammig skorn oa greet an noz a-raog, ha, faote ket boud souezet, d'ar houlz-se deuz ar bloaz, O ! med se ne ree mann. Pa oa komañset war-lerh koan Erwan Vraz hag Erwan Vihan da zon ken e kerlenenne ar vro, paotr paour a laran, O ! la ! an dañs ah ee en-dro, an dud a droe hag a distroe, a blege hag a zisplege, hag a stoke o botou an eil ouz egile ken e veze klevet an trouz war al leur skornet.

An dañs 'n-oa padet, n'on ket 'vid lar deoh petra, ped eur, med me 'gav din pa errued tost d'an deiz, ha pa oa komañset an dud d'hond kuit, med gwelet 'peus brini war eur parkad kerh ? eun 'h a d'eun tu, eun 'h a d'an tu all, ha 'benn ar fin, vez ket den ebed ken. Evel-se oa bet kont ennañ.

Hag an daou zoner oa eet da gousked, gast, O ! dalv ket ar boan da lared deoh, 'benn neuze, 'benn neuze, noant kemeret beb a damm kont o-daou, kar, eun dra vez lavaret, gwechall-goz ha huru an deiz 'ma gwir c'hoaz : « Gwelet 'zo bet sonerien hag a zone deoh heb debri tamm boued ebed, med pas hemb eva. » Nann, honnez 'zo eur vicher hag a zizeho gorzaillenn heb tamm hag a beb maread 'ma dao dezo evo eur banne. Pez 'oa arru gand an daou zoner-mañ !

O ! se ra mann. 'Benn oa an deiz war-lerh, da greisteiz, ar re-mañ oa o-daou war droad c'hoaz, ha prest da adkrogo o micher, ken lemm 'vel en deiz 'raog !

An deiz war-lerh, goud a rit, deiz war-lerh an eured, an dud tost-kar a choma da leina, ha, dreist-oll, 'vez pedet ar zervitourien, ar re bet o labourad an deiz a-raog, ar re o-nije servijet evid kempenn an traou, 'vid lakaad ar prejou da gerzed mad, evid gwalha ar plajou, soñjit 'ta ! A ! Dipi Dero, ar plah koz a vez kemeret da ober ar vicher-ze ! An dra-ze a blije deze, spontuz. Marianna oa unan bepred 'ta, ha honnez, me lar deoh, oa eur plah a volontez vad, med, eun tammig, pa oa yaouank, 'n-oa bet eun tammig broñchid, an dra-ze oa chomet war he halon, ha beb 'r mare veze dao desi kaoud eun tammig lambig, eur banne kreñv. A ! neuze, eh ee endro gand an hent !

Setu, pa oa debret lein gand ar zervitou-rien, kar, d'ar mare-ze an dud-eured 'zervije d'o zro ar re 'n-eze servijet aneze a-raog, hag an dra 'zo eun dever deuz perz an dud yaouank, rei da zebri d'ar re 'n-oa servijet aneze ha servijet touz ar famill vraz.

Erwan Vraz hag Erwan Bihan 'ni 'n-oa sonet c'hoaz : an deiz war-lerh d'an dud eured ennañ. O ! n'on ket 'vid lar' deoh pegement, pegement, pegement a zañsou, pez o-noa greet an deiz 'raog. An deiz 'raog, med me lar deoh, marteze noant uzet eun añchenn pe diou, kement noant sonet. Setu, pa oa eet tost an noz, Erwan Bihan lara d'Erwan Braz :

« Kamarad, prestig e vo poent mond d'ar gêr, kar an traou deñvalla, me 'm-eus aon e rafe erh fenoz. Ha, ya, med a-raog noant eur gevridi d'ober, dao dezo ober eur pennad hent gand an dud, ar re euz an dibab a oa deut d'an eured ha d'an had-eured, n'eo ket dre blijadur, med, goud a rit penaoy e veze kont, p'e-nezent ambrouget an dud-se war an hent eun tammig,

tapet eun tamm gwerz-butun, en tu-mañ, en tu all, hag an dra-ze 'greske o gounidegez memestra.

A ! bez' oa erru 'n noz memestra, lare Erwan Vraz, kenavo d'an dud-eured, kenavo d'o herent, kenavo d'an oll a oa ennañ c'hoaz. A ! 'h eent sa bourk Plougernevel ives 'n eur gonto 'tre dezo o-daou, evel vefe bet eur vandenn dud war an hent, ken evuruz e oant. A ! plijadur noant bet ha gounidegez oa. A ! se a gonte.

Erwan Bihan lare d'Erwan Vraz :

« Malloz an Doupenn ! paotr, Soaz 'vo eüruz pa 'mo diskouezet 'pegement a voneiz 'zo ba' ma godilli amañ. A ! ya, hag ho hini goz 'vo ives, moarvad. O ! ya, lare Erwan Vraz, n'eus ket 'med an dra-ze ken a gonta eviti ! »

Pa oant erruet ba'r bourk, Fi d'am Doue, lare Erwan Vraz, me 'm-eus sehed ! Ha oant eet ba' ti, Eu ! 'm-eus ket soñj, Job ar Jistr gredan 'walh veze greet deusañ d'ar houlz-se, hennez oa o terhel eun ostaleri 'kreiz ar bourk. Evet noant, O ! beb a, O ! tri pe bevar banne jistr, '-doa evet ennañ, ha daou pe dri banne hani kaled pe 'giz-se. A ! A ! A ! ha neuze n'ee ket ar goañ warne ken !

E oant sa'r gêr, c'hoaz, hag erruet ba' beg hent Kerniz, Erwan Vihan lare d'Erwan Vraz :

« Deuit ganin beteg 'r gêr, deut da weled ma hini goz. Honnez a vo kontant ; 'n-eus ket gwelet ahanoh 'zo... Erwan. »

« O ! ya, med an dra-ze 'zo 'vond da hirraad ma hent. »

« N'eus forz, an noz 'zo hir, bremañ. »

« A ! dam neuze ! »

Erruet 'barz an ti, Erwan Vihan e-noa lakeet ar hafe war an tan. Naon noant ket 'had, O ! nann, nann, nann. Debret noant tra-walh 'pad an daou zeiz-se, naon noant ket bet. O ! Eun diverad bennaked refuzant ket jamez. Noant evet kafe, hag eur bannah hani kreñv 'barz. Marteze, eur skudellad jistr pe diou, lakeet da domma ba' kichenn an tan ennañ. « A ! memestra, lare Erwan Vraz, poent eo din mond d'ar gêr, bremañ. O ! arru eo 'n noz, arru eo 'n noz. Ped eur eo ? » a houlenne gand mestrez an ti.

« O ! n'eo ket pell deuz deg eur. »

« O ! gast 'had, O ! O ! deg eur ! A ! A ! A ! neuze 'h an gand an hent. »

« O ! keit-sea», e lare. « Kenavo deoh toud, kenavo ar wech all ! »

« Me, a lare Erwan Vraz, me zo 'vond a-dreuz, me a anava eun hent ; heb gweled takenn ebed, me hey heb 'n em drompli war an hent-se. Kar, mond da glask an hent braz bremañ d'hond d'ar gêr, zo re hir. » Ha oa eet.

A ! pa oa 'tremen 'tal ar menhir, goud a rit peleh 'ma ar menhir-ze, ar menhir braz-se, O ! O ! 'n-eus diwisket e dok, ha 'n-oa laret dezañ 'n eur dremen evel-se : « Salud 'ta, Mestr an Eternite ! »

Hum ! Hum ! 'n-eus greet eun tammig c'hoarzadenn, hag e oa eet war-raog. Med an erh zo komañset da gouezel. A ! A ! an dra-ze chañche kanaouenn ha diou wenojenn oa evid mond d'ar gêr, eun deuz ar gwenojen-nou a gase anezañ a-blomm-kaer d'ar pont mein, ar pont mein a zo savet amañ abaoe amzer Matuzalem marteze. Hag eur weno-jenn all a gase anezañ da doull ar bleiz a-eeun. Hag ober ree erh, hag Erwan Vraz 'n-oa obliket eun tamm gand ar jistr hag ar lagoud 'n-oa evet aze, ha 'leh kemer ar wenojenn 'n tu dehou, 'n-oa kemeret hini an tu kleiz.

Ha, heb soñjal mann ebed, beo, soñjal oa Nedeleg an deiz war-lerh, O gast ! 'n-oa kouezet ba'n toull don. O ! Malloz ! Doue ! a lara-eñ, peseurt toull gast on kouezet amañ 'giz-mañ, hañ ?

A ! oaran ket pe war e benn pe war e hed, penaoz oa, med 'benn oa savet war e zao, ha greet 'n-oa eur zell en-dro dezañ, O ! petra 'n-oa gwelet ? Diou lagad, diou lagad ruz ba' korn an toull, hag a zelle eeun outañ. Gast ! lare Erwan Vraz, eur bleiz ! eur bleiz ! O ! Malloz gast ! O ! Eu ! Trei ree e wad bannañ, tomma ree e wad ken na zante ken e dok war e benn ken. A ! n'e-noa ket kollet anezañ koulskoude. A ! Penaoz e rin ? Derhel ree e anal gantañ ; heb fiñval eun dakenn, e zellou paret war zellou ar bleiz, 'vel daou enebour a vefe prest d'en em daga. Ar bleiz oa azezet war e benn a-dreñv. E daoudroad oa pozet dirakañ, prest da lammad war an hani oa en tu all dezañ.

Erwan Vraz lare :

« 'Vid soñj ? Petra rin ? Saillo war ar bleiz ? Tago anezañ ? Ya, med, marteze, hennez a dagfe ahanon. Nann. »

Eur zoñj a zo deuet ba' e benn. Hag e-neus digoret e vuzeñenn, trankil, heb trouz, heb koll eur zell diwar ar bleiz e-noa lakeet eun añchenn war beg e vombard ha la ! 'n em lakeas da zon, da zon, da zon, da zon, gand toud e nerz, gand toud pez oa ennañ ; sonet 'n-eus, n'on ket 'vid lared deoh, 'pad eun eur, ya, 'pad div eur, 'pad teir eur, sonet 'n-eus ken oa eet tost an deiz, sonet 'n-eus gavoten-nou, sonet 'n-eus dañs Fisel, dañs Plin, dañs Kost-ar-Hoad, dañs ar Jabadao, dañsou deuz kostez ar mor ha deuz kostez kement bro a anaveze toud, kantikou memez 'n-eus sonet war e vombard. Hag an deiz ne dee ket. Erwan Vraz zante e nerz o nebeutaad tamm-ha-tamm, tamm-ha-tamm. Hag e lare d'e zoñj e-eun :

« Daoust ha 'h in beteg an deiz ? »

Med eur volontez oa ennañ memestra a lare : « Dao vo din dalhen, ha dalhen a rin ! »

E wreg, 'pad keit-se, oa ba' tu all d'ar pont, he-deus divunet re kér da lared penaoz Erwan Vraz n'eo ket deut d'ar gér fenoz. Eet oa d'eun eured en tu all da vourk Plougernevel, ha marteze, ma Doue, 'ma kouezet ba'r pont, 'ma kouezet ba'n dour ! Deut ganin, 'h an di gweled. »

Ha setu neuze tapet eur goulou, a zo deut paotred yaouank, deuz kér zo toud, da weled ; tapet oant... welent ket. « 'Ma kouezet ba' toull ar bleiz, ya, med ar baotred yaouank-se a lare, marteze a-walh. »

« Tapam beb a forh, tapam beb a forh, betegoud 'ma kouezet ba' toull ar bleiz ! »

A ! ger ebed. An amzer oa sioul pa oant 'vond deuz kér, med beb ma tiskennent ar grapenn, tost da bord ar waz, amañ giz-mañ, e klevent eur zon, eur zon hag a zeue deuz foñs an douar. O ! Ma Doue ! 'larent, paotred paour ! Erwan zo kouezet ba' toull ar bleiz, me 'zo sur, lare an hini goz ; me 'zo sur 'ma kouezet ba' toull ar bleiz. Dam prim 'ta, dam founniz. »

Ha hè 'vond, en eur haloupad, pez oant 'walh evid ober. Pa 'maint arruet dirag an toull, ya, Erwan Vraz, 'vel-mañ eo eet, oa kouezet c'hoaz tre, med 'vond war e gostez oa, med son 'ree bepred, son 'ree bepred, ken e tistone ar zaonenn. Hag ar bleiz oa en tu all ennañ, oa astennet, astennet maro. Ar zon 'ni oa 'n-oa lahet anezañ gand e zoniri ; gand e vombard 'ni 'n-oa lahet ar bleiz, ha saveteet e vuhez.

P'e-neus greet eun tamm diskuij an deiz war-lerh, neuze, rekoñfortet gand e wreg hag e amied, Erwan Vraz oa eet d'an overenn hanter-noz, ha larit war ma lerh, hardiz, n'eo ket eñ oa an diwezañ d'arrued ba'n iliz, ha 'vel ar bleiou tremenet 'n-eus kanet kantikou 'vid ar Mabig Jezuz, ha me lar deoh, oaran ket ma eo gwir, boud a zo re a lare penaoz e ganaouenn oa ken kreñv, ken e saille ar mein glaz diwar doenn an iliz. Ma eo gwir ba' ennañ, amañ 'ma iveau. Setu 'ma echu ma rimodell.

